

1. Bretoned deud da chilaou · eur zon neve zaved
Gand eun istrogell yaouank trubuilled e spered
2. Me a zo bed stajeta ba Zant Yann Brevelê
'Zonj kaoud eun tamm plijadur ha diski traou neve
3. Med red eo din-me amzao meus ked kaved ma hont
Ha war du diskrap ar yar meus gwel'd an traou o hond-
4. Lared oa din oa gwelloh vid ma vije gwechall
Chançhamant 'bed meus gweled na posubl eo on dall
5. An dud a oa sirivuz war o meno bepred
Eno vije ked farsed na kaned na dansed
6. Vije ked kanaouennou gand den ebed deuz tól
Kuntuni diskutadeg an dra-ze gavan drol
7. Ar pennou braz a gav dê maint ba'r gouarnamant
Nemed dindan o beli n'eus ked ouspenn tri hant
8. Distaged vije gante zarmoniou hir meurbed
En galleg ken kompliked ken e chomen kousked
9. Na magner hoant zo deud din da ziski ober stamm
E leh chilaou diskouriou dalveaint ked eur bramm
10. Me ho ped pôted ar Falz da brena brecheier
'n eur vredi pulloveriou gollid ked hoh amzer

Zaved gand Humphrey, heuged gand taskaillerez Bodadeg Veur
AR FALZ ba Zant Yann Brevelê (miz gwengolo, 1977), ha kaned
eno gantan goude koan war eun ton hirvouduz.